

- 63 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

107. AN TOURELLO

(follennoù 63-65)

Ker(r)vegant ag an Tourello
a zo mignonet pel a zo.

Na Kervegan a lavare
Dan otrou an tourello en deïs-se :

- N'otrou an tourello ma nam c'haret
Da vaner an Dour ganen a deuffet.

Dem-ni da vaner an Dour bremen
Nag evid goulen ar verc'h enan.

- Debonjour a joa ebars an ti-man
An demezel pa ne goëlan?
Me zo deud de goulen dan den-man.

Nag an demezel evel ma klevas
gant ar vins d'an traon e diskennas :

- Tollid evez, va zad, petra o pe gred
evid Kervegan me na mo ket.

Goël eo ganen an Tourello
evid Kervegan gant e vado.

Na Kervegan evel ma klevas
Var gein e varc'h prest e lamas ?
Nag el Leo-drez promt e harruas.

A Kervegan a lavare
bars al Leo-Drez pa harrue :

- Me moa bed klevet a pel a zo
e voa poëltron an Tourello.

Ag e voa an Tcurello poëltronet
evid c'hoari eun toll fleuret.

- Fenos toll fleuret me ne c'hoarian.
Na vin e Lezormel o kcanian
assamblez gant va c'hoar enan:

- 64 -

Na Kervegan a lavare :

- Laka kleze e torn pa giri
fenoz e renkom c'hoari ar barti.

Pa voa eunan arrog e c'hoari outan
e voa daou a dreg e gueïn doc'h e lazan.

Gantan an deus klevet ar fors ar gri
e voa Lokren a tud e di.

Na Lokrenan ag e potret
e voa o chassea er vezek.

Na Kervegan a lavare
D'an Tourello enon neuze :

- Tourello, maz oud en bue
gra eur seblant benag ouzin-me
a me a klasko beleg d'ha hene.

- eun offern dirag ar Sant Iboan
ma vezin lamet buan a poan

ag (eunal dirag ar Speret glan
ma zin dar baradoz buan)

Ar gouarnerez a lavare
Da zimezel an Tourello ag an de-se :

- Eun tra benag a nevez a zo arruet.
Marc'h an otrou d'ar ger a zo deuet,
e man deuet marc'h an Otrou aman
Na nen deveus kristen deus e vleïnan.

Nag an demezel a lavare
E prenest e c'hamb pa selle :

- Na leket-tu ar ber doc'h an tan
Me a vel erru va breur d'he koan.

Kompagnuez vrás a zo gantan.
Nen de Lokrenan var a vellan.

- Debonjour a joa bars an ti-man
eur c'helou trist a meus da lavaret enan,

- 65 -

eur c'helou trist a meus da lavaret :
an otrou an Tourello a zo lazet.

Nag an demezel evel ma klevas
Na dal Leo-Drez promp e ias.

Kris e vije ar galon na voëlje
ebars al leo trez neb a vije :

E vellet demezel an Tourello
e vriata eur c'horf maro

Brava den a varch var ar pave
e voa va breur an Tourelle
gant avi outan e bed lazet.

—————
VVVVVVVV

Mari Bozeg 18 Févr. 1851

—————
VVVVVVVVVVVVVV